

# GANET EO BET

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg.

A  
D: Ga-net eo' bet eur Ma-big deom, deut eo er bed 'vid chom ga-neom hag

T

B<sub>1</sub>  
Ga-net eo bet eur Ma-big deom, deut eo er bed 'vid chom ga-neom hag

B<sub>2</sub>

en or hreiz e sao eur han, war hent ar feiz 'z-eus eun tour-tan.

en or hreiz e sao eur han, war hent ar feiz 'z-eus eun tour-tan.

1- Er-ru eo da har-pa an den klañv, da rei dorn d'an den paour 'n e e-zom-mou

Er-ru eo da ha-da bleuñ an hañv, e peb korn, war beb skourr 'n or ha-lo-nou.

- 2- Erru eo da lopa war an nor,  
Da hervel heb repu ar plah gwasket,  
Erru eo da foueta 'vel ar mor  
Peb brezel, peb harlu, 'n or bed gloazet.
- 3- Erru eo da skuba trouz ar bed,  
En on ti e teuio da azeza;  
Erru eo da gestal 'poent ar pred,  
Ouzom-ni 'houlenno eun tamm bara.
- 4- Erru eo heb strakal tro-war-dro,  
War e zremm eur mousc'hoarz a garantez;  
Ha be 'vo eur wech all en e vro  
Eun estren war eur groaz a follentez ?

- Ref : Il nous est né un Fils; il est venu au monde pour demeurer avec nous;  
Dans notre coeur se lève un chant, sur le chemin de la foi, il y a un phare.*
- 1- Il vient soutenir le malade, donner la main au pauvre dans ses besoins;  
Il vient semer les fleurs de l'été, partout sur chaque branche, dans nos coeurs
  - 2- Il vient frapper à la porte, appeler sans cesse la fille écrasée; il vient battre, comme la mer, toute guerre, tout exil dans notre monde blessé.
  - 3- Il vient balayer le bruit du monde, dans notre maison il viendra s'asseoir;  
il vient quêter au moment du repas, il nous demandera un morceau de pain.
  - 4- Il vient sans crier tout autour, sur le visage un sourire d'amour.  
Sera t-il encore une fois dans son pays un étranger sur une croix de folie ?